



## Raktres c'hoariva KEAV 2018

### Stal c'hoariva

✓ **Ar furlukin**

Ar furlukin a sikouro pep hini da c'hoari da vat ar pezh a zo don en e galon, da vezañ dres d'an ampoent evit santout ar fromoù, da vezañ war evezh e pep mare ha da vezañ kad da c'hoari war ar prim. Pleustradegoù a vo diazezet war an alan, ar selaou hag ar selloù.

✓ **Ar c'horf hag ar vouezh**

A-raok kregiñ da c'hoari e ranker kemer amzer da zistignañ ar c'horf. Er vuhez pemdeziek e vez lakaet bec'h war an den, war e gorf. Neuze e vo kemeret amzer da sioulaat ha da selaou ar c'horf dre pleustradegoù Qi Gong evit mont e darempred gant hon diabarzh deomp-ni. Peurachuet e vo al labour gant ar c'horf a drugarez d'an dañs a sikouro ac'hanomp evit kaout skiant eus an egor tro-dro deomp hag eus korfoù an dud a vo a-gevret ganeomp-ni war al leurenn. Pouezus-kenañ eo alaniñ mat. A-drugarez d'an alan e c'heller implijout mat ar vouezh hag ar c'horf.

✓ **Ar skritur**

Pep hini a c'hallo lavaret ar pezh a zo don en e galon. Al labour gant ar c'horf, gant ar vouezh a vo un digarez da bep hini da ijinañ ha da skrivañ istorioù berr.

Ul labour a-stroll eo ar c'hoariva : ober anaoudegezh gant ar re all, kemer plijadur, ha kaout doujañs dreist pep tra. Ret a vo dont bemdez ha chom betek Gwener noz evit an abadenn.

### Petra zo da zegas ?

Dilhad du skañv, botoù du skañv (pe botoù dañs), un tog, un tapis, ur c'haier hag ur c'hreion.